

YF_0009_Ar Paotr Yaouank Koz

Me a zo chomet da gosañ ha n'on ket c'hoaz dimezet
Ha dre-se on gwelet fall gand an dimezeled

Ar merc'hed a oa gwechall a glaske labourad
Kannan gwenn ar rochedou, ober stamm ha gwriad

Med ar re yaouank bremañ a zo o klask bezañ koant
Setu aze evid petra on chomet paotr yaouank

Dre ma 'z int bet pell er skol o teskiñ ar galleg
Kaozeal, lenn ha skrivañ evel d'an avokated

Da labourad a gredan, n'o-deus ket kalz a c'hoant
Ha setu aze evid petra on chomet paotr yaouank

Pa gemerfet eur veridi e kemerit eur vatez
Da c'horañ, da ribotad, da gas ar saout er-mez

Rag ar wreg ne brizo ket kalz he zreid er fank
Setu aze evid petra on chomet paotr yaouank

Pa vo pardonioù er vro, he a yelo da zansal
Neuze e vo klevet c'hoarzin hag he zreid o strakal

A-benn ma teuo d'ar ger an oll dud o kousket
An tad a huñvreo start hag ar vamm a vo nehet

Neuze e vo klevet Janig o vale dousig d'he hambr
Setu aze evid petra on chomet paotr yaouank

Hag an deiz warlec'h e chomo e-pad an deiz en he gwele
Gand eur boan e-barz he diouhar pe eun droug en he c'hoste

Rag keit ha ma oa hi o tañsal he-deus tapet eul lamm
Setu aze evid petra on chomet paotr yaouank

Eun dilhad eus ar c'haerañ a renko c'hoaz da gaoued
Eur robenn brodet gand seiz hag eun tog alaouret

An dra-se a vez ken gwall bell e tigas eur mil da bemp kant
Setu aze evid petra on chomet paotr yaouank